

800 A

JUJAMANT AR MESVIER A TRISTIDIGUEZ E DUD

Composet er blavez 1897

Var eun ton trist

Oh ! te den losq a frajil, oh ? te na sonjez ket
Laret pèd guech da Zoue, o heus bet prometet
A renonses dar boesson, guel a ve dit mervel
Evit na ve cometi, cant mil behet marvel

Pa he evet eur bane, a garfez caouet dec
Deut eo an heur da zonjal, hoas na mont ket abret
Ober a ra da valeur, a hini a real
Da dud e zo er jagrin, poënt bras eo dit dioual

Var digare lavaret, penos a vez diez
E zout bet deut da guemer, banahou aliez
Ouspen e teus da guemer, aliez pemp a houec'h
A cetu neuze clan braz, calz a jagrin a n'ech

Ouspen hoas te a jagrin, da vrec da vugale
A kement zo var da dro, zo tourmantet neuze
Coll a rez ive dan enor, da reputation
Da ene a zo siouaz, cazi en abandon

Gra breman reflexion, guel gant da zaou lagat
Tout pen da ben da vuez, pegnement eo ingrad
Da vrec a da vugale, goude beza ayaouanc
A scuill calz daelou houero, gant an nec'h a tourmant

A houi bugaligou guez, avans a red en oad
O chagrin a vo ep fin, mar na chanj ket o tad
Er baourente ar vrassa, a guemente ze on sur
A goal dretet aliez, po met displijadur

Chom ep gonit aliez, a dispign nos a de
Goude dispign e arhant hoaz a guemero gle
A goude a vo clan braz chom a rai ne vele
Neuze houi bugale baour, a voer baourente

Houi grec a bugale guez, truez eo o kuele
O ouella o hirvoudi, tro var dro dan oaled
O tillajou a fal, matreze ep tam tan
Eun druez eo kuele, bugaligou vian

O kueleou a zo fal, matreze bugale
O mam a zo en tourmant, a houi a zo ive
A hoaz e halfe siouas mankout boued eno ti
A no puez nemet eun tad, evit o tourmanti

Partout lec'h ma dremeno, na pakin nemet mez
Eu tu al do tourmanchou, a dro tristidiguez
Distrujo a ar e gorf, ac ouспен sonjit mad
An hini a vevo fal, a varvo neur goal stad

Dont a ra de nem zaoni ober d'och dienez
Eur goal scuer ezeo ive, ouспен bugale guez
Rebutet eo gant e dud, couls a gant e nessa
Daoune a vo er bed all, dizprijet er bed ma

Dispign a ra e arc'hant, tracas nec'h a mizer
Sellit a guelit o stad, breman paour kez mesvier
Deut dober reflexion, da lacad no spered
E neur heuil ar sort buez, petra a honeed.

Sonjit mad er chanchamant tre houi ac eun den fur
Ac o velet en pelec'h, ema ar blujadur
Gant tud fur ema eürus, o bugale
Contantaman plujadur, an eil gant eguile.

Deus da lavaret breman, mes lavar o galon
Ret a vo deus a vremen, dilesel ar boesson
Guel a ve dide mervel mar varves neus stad vad
Evit na ve birviken, dont da eva eur berad

Ar brezel a vo stard, eur veich habitued
Nemes gant sicour Doue jamais ne vanko ked
Rac hounez e zo ar pen, deus an oll valheuriou
Eno ema ar zoursen, demeus an oll vissou.

Neuze Doue pa velo, a heuz bolontez vad
Teuzo gant joa de sicour, da zont dees da oal stad
A te demeus da gostez, renko combatti ferm
A renta brezel bemde, da brinssou an éfern.

Na neus ket mal'heur a bet, siouaz bars er bed ma
Evelt hini ar mesvier, henez eo ar brassa
Soursen eo danoll vissou, mam an oll valheuriou
Distruja ra net ar horf, a laze en eneu.

Deus ar pounera croaziou, roet deomp gant Doue
Tout an nec'h ac ar glahar, mizer a paourente
A vezo recompanset, gant eur mest dous a mad
A pa zeüo ar maro, a vo fin d'ar gombad

Nemet ar paour kez mesvier goude e dremenvan
A hel lavaret hardi, ma flas a zo en tan
A couskoude ar vuez, a zo poenius a ber
An eternite a zepand, deus or buez antier

Ar hlemou man zo rimet, gant calez a hlahar
Goude eur bromessa ferm, a zezir ar pouvoir
Dar hallout nem resolvi, keit a ma vo er bed
Da renons da vurviken, d'ar boësson milligued

FIN.

Corentin BOUARD,
deus Collorec.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC, Yoes.

FRAJILITE AN DUD YAOUANC

Var eun ton rigolo

Ni boa eur hoguic yaouanc oa duman guenemp-ni
Oa comanset da gana, mes breman na ra mui
Eun nosvez goude e goan, o tont eur zonj ne ben
Me a renk mont en nos man, var digare pourmen.

Me renk ober eur pale, eun droyad var ar mez
Da glask e merh Perina, digant a intanvez
Pe guir on hanvet coguik, gant oll dud ar vroma
Me garfe caout eur bolez, vit nem zivertissa.

Pa meus tapet an hano, a goguik vit partaj
Vo ret din caouet parrez, da gomans ma menaj
Perin merh an intanvez, hounez a zo dam grad
Kannerez a denserez, brillant e daou lagad.

Bonsoir dehu intanvez, setu me deut exprez
Da glask o merck Perina, da hanter tieguez
Rac keit a ma vemp yaouanc, or bo contantamant
A plujadur a sables, ep chagrin na tourmant

Ma merck me zo abredic eur blavez hoaz
Mar de contant ar buguel, me na renket a gaz
Kousket eo eue guele, er pen dan traou a ti
Monet a ran de havet, da houlen diganti.

Arsa ma merh emezi, na din me levered
A houi zo contant paouric, da gave'l eur bried
Berroh kafet an amzer breman epad an anv
A toma doh o kuele, goude pa zeui ar goanv.

O ya va mam emezi, certain me zo contant
Demeus a greis ma halon, da gaout eur pot yaouanc
Mar dai caner a dansser, ac eur pot delicat
Neuze a meus esperans, d'ober tieguez mad.

Neuze ar pot yaouanc man, a zo joaus a ye
Ac a zistroas dar gaer, hed an hent neur gane
Penos eta yan goguic, te zo bet o vale
Eun tam mout divezit, o hanons domp an de.

Neuze zistroas ouzin, gant eun air da hoarzin
Mar de guir on me koguic, houi zo eur louarn fin
Houi pefe ar vadelez, da vont breman ractal
Da anons ma dimezi, betec ar presbital

Ar hoars var ma muzellou, pa non ket vit miret
Ya va mignon emezan, me rei ze na reket
Monet a ran evidoh, betec ar presbital
Rac merh an intanvez, evidoh ne ket fal.

Bonjour da autrou person, me a zo deut gant prez
Da hout a houi zimefe, eur hok ac eur bolez
Pere o deus dezir braz, da vea unisset
Eun tamic a zo deja, o deus enem choaset.

Neuze a respontas din ive neur vous hoarzin
Deus aman ebars er zal, kemer eur bane guin
Troët ezout bepred, eun tamic de keyyer
A te heus klevet jamais, ve dimezet ar yer.

Eskusit nautrou person, mar meus drouc parlatet
Malheur eo dandud yaouanc, pere zo leshanvet
A re a barlantan doh, a zo daou zen yaouanc
A zezir be unisset, velt diou galon gontant.

A re a barlantan deoh, zo mal a fumelen
A zezir bea staguet, gant ar memez chaden
Unan ane triveh vla, an hani all pemzec
Zo pel zo braz en hirvout, hortoz be dimezet.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dont an illis
A me o interrojo, var dern a hatekis
Pa oa goulet digante, o na ouient netra
Demeus ar zacamanchou, a re brinsipalla

Filet dar guer bugale, evit eur b'oa pe daou
Da hortoz ma po desket, dern ar zacamanchou
Neuze zavas e ziou skoa, me a gred a zonje
Eun druez eo emezan, dimezi buzale.

Neuze a zeont d'ar guer, o daou eneur ouela
Ret a vo demp emezo, donet da studia
Ret a vo demp studia, couls an de ac en noz
Mar ouefomp ket re neve, ni zeskoa re goz.

Tri pe bevar mis goude, a ya an intanvez
Da gaout an autrou person, da lar dan tol evez
Rac va merch zo languissant, eun tami zo déjà
Seul vui avans e hlenvet, ya bepred var vella.

Setu an autrou person, dezi neus lavaret
Lavarit dezo dont boas, ac a vont dimezet
Aoui a fad daou zen yaouanc, a lavar ar person
A oar nem gonvertissa, ep mont dar mission.

Ar memez ira ezint bet, dimez ac eureujet.
Gras da vëa eüruz, keit a vont var ar bed
Bonheur zeziromp de keit a vont er bed ma
A goude pa vont maro, er gloar da jouissa

FIN

CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC, Yves.

CHANSON

POTRET PLOUILLAU

Var ton : *Adieu, Pontreo*

M'am bije speret da gompren, evel a meus fantazi,
Me a vije n'en impliet da zonet da gomposi
Eurc'himiad lenn ac'hlac'har, gret da gonscrivet yaouanq
O deus tennet ar billet ebars er blaves brezant.

Ebars er bla mil eis cant c'hoec'h, bemp a vis guengolo
E zeo digueet adare eus a baros Plouillau
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an derrupla :
Glac'haret eo oll ligne p'o gvelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus quen nemet pevar ;
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan Ar Meledar,
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant :
Pevar den eus ar re vrava, corfou caer barud vaillant

Ervoanic Jacob a lare en deiz ze d'he gamarad :
Eman a zo eun devez trist hac a ra din calonad !
Guelet ma mam baour o vouela, ha va zad qes desolet
Va c'halonic ebars em c'hreiz so dija casi rannet.

Calz a sonchfe de, marteze penos e vent eur poultron
Em be aoun rac eun ten fuzul ! pe rac eur voulet canon
P'otramant aoun rac ar fatiq o vale dre an hentchou,
Pe gousquet var eur guelet can ebars er c'hordegardou.

Dougen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va zabren,
Bale bemde a guer dargner dre a fanq hac vouillen
Ha goude e fin va beac'h rencout marteze campi,
Pe gousquet var an douar ien pe otramant biouaqi.

Toro deus an nepa sonchse : mac'haljent leun em c'halon
Evit guelet va bolonte ha va inclination,
Ma na fofe nemet va goad, me en scuilfe tout joaüs
Evit souten hon Impalaër, eun tad quer carantezus !

Piou na gombatte quiet gant eur Impalaër christen ;
Eur gaus quer just hag e hini zo facil da zouten,
Pa somp mempreu da Jesus Ghris, soudardet an Aviel
Bugale da Zoue au Tad, tamplou da Speret-Santel.

Arça eta, camaradet quen quitaad euz or chontre
Demp ni da ilis Plouillau da supplia hon Doue
D'hor preservi demeus goal chans pa vezimp en armeou
Ha da gonsoli bars er guer hon tadou hag hon mamou.

Adieu dec'h, Autro Sant Millau, patron euz ar barous-ma
Adieu quereat ha mignonet cessit breman da vouela
Pedit Doue hac ar Verc'hez da gavet soign ac'hanomp,
Hachou Ael mad d'hon chondua partout elec'hon a zefomp.

Adieu, va mab, va esperans, eme o tad desolet ;
Piou a gonsolo oa dud paour goude ma vi partiet ?
Pa vin accablet gant cozni, me vo clevet o laret :
Ma vije ma mab quez er guer en dije va soulaget.

Clevit ar vam o kimiad ive digant he buguel :
Deus a na c'hoas ma boqin eur vech quent eguent mervel
Aben ma retourni dar guer me vo ed euz ar beb-ma,
Deus aman etre va divrec'h evit ar vech diveza.

A guichenen ar momet fatal ma c'heus lennet d'ar billet
Beb noz vel ma fo di cousquet me a seblant da velet
O tont eus eur gombat sanglant var eur chariot blesset,
Pe tolet en eur hospital, gant an oll abandonnet.

Ar zoudard yaouanc contristet c'hoas quen eguet partia
Evit essato c'honsoli a lavar en eur vouela :
Tavit va zad ha va vam baour, ha bevit en esperans,
Doue, tad ar visericord, a zo bras e brovidans.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gras Doue hag ar Verc'hez, e vezo fin do glahar,
Evit m'erq eus hon vaillantis, gant lore deus hon tocou
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taëlou.

Adieu da baros Plouillau ha de oll habitant
Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha quereat ha mignonet,
Ha ma na memp quiet ar bonheur er bet ma d'enem velet
Gras deomp ebats er Barados assembles d'en em gavet.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC.